

Redadeg 2012 !

*Pozioù get 4^{vet} klas Skolaj Diwan Gwened
Sonerezh get David ar Gall*

Redadeg, savit ho taouarn !

Redadeg da Zouarnenez.

Redadeg, komzit brezhoneg !

Redadeg 'vit ho plijadur.

Evit mont a gêr da gêr,
E vo ret treuzkas hor yezh,
Komzit brezhoneg geneomp !
Evit hor bro e redomp

A-hed an hentoù tremenet,
Hon eus kavet mignoned.
Breizh en he bezh a vo treuzet,
Ha hani ne vo disoñjet !

Klevit talm hor sonerezh,
Evit redek àr ma lerc'h.
Brezhoneg 'vo ma rod-stur,
Fiskal e vo a dra sur !

Plijadur evit an holl
Bras pe vunut, gwenn pe zu,
Redomp dre ar manezioù,
Dre ar c'hêrioù, ar maezioù !

Harpet get kan an evned,
G'an heol splann hag ar loar-gann.
Get levez e redit,
Mod-se 'kanimp dizehan !

